

**Mikael Bodlore-Penlaez**  
**Lid kolier Urzh an Erminig, Karaez, 17 a viz Gwengolo 2016**  
**Cérémonie du collier de l'Ordre de l'Hermine, Carhaix, 17 septembre 2016**

Keneiled ker,

Hiziv eo un enor evidon da gaout kolier Urzh an Erminig. N'eus ster ebet a gav din d'ober ur brezegenn hir pa vez kavet ar pezh a soñjan en un doare don er raktresoù 'm eus savet hag el levrioù 'm eus kenskrivet pe kartennaouet. Kouskoude e vo plijusoc'h deoc'h klevet ur barzhoneg skrivet gant Anjela Duval e 1969 anvet Frankiz. Mont a raio sur a-walc'h war-eeun d'ho kalonoù.

A-raok pep tra e fell din trugarekaat pevar den evit ar blijadur 'm eus bet da labourat ganto da lakaat war wel an doare da welet dazont hor bro. Divi Kervella, 'm eus labouret gantañ war kalz a raktresoù hag a zo un den a zougan bri dezhañ. Trugarez ivez da Erwan Chartier-Ar Floc'h eus Coop Breizh ha Yoran Delacour, ma embannerien. Hag evel-just ma gwreg, Marie.

Ne vo ket disoñjet ar re 'm eus rannet ma c'harantez ganto evit un entan boutin, da lâret eo Breizh en he ziriad a-bezh, ar brezhoneg, liested ar bed, hag ar gwir d'ar bobloù da zivizout evit dibab o dazont...

Chers amis,

C'est pour moi un honneur de recevoir aujourd'hui le collier de l'Ordre de l'Hermine. Un discours de ma part n'a pas vraiment de sens dans la mesure où les projets que j'ai menés et les livres que j'ai coécrits ou cartographiés résument ma pensée profonde. En revanche, vous aurez plus de plaisir à la lecture d'un poème d'Anjela Duval, intitulé Frankiz (Liberté) datant de 1969, dont la sincérité et la force toucheront certainement vos cœurs.

Avant cela je souhaite remercier quatre personnes pour le plaisir que j'ai à travailler avec elles à éveiller les consciences sur l'idée qu'on se fait de la Bretagne. Divi Kervella avec qui j'ai partagé de nombreux projets et que j'estime grandement, mes éditeurs Erwan Chartier-Le Floc'h de Coop Breizh et Yoran Delacour. Et bien entendu mon épouse, Marie.

Et merci à tous ceux avec lesquels j'ai partagé des moments d'échange autour de notre passion commune, la Bretagne dans son intégrité historique et humaine, la langue bretonne, la diversité du monde, et le droit des peuples à décider de leur avenir...

**Frankiz (Anjela Duval, 1969)**

Nerzh-hud da anv  
A had follentez dre ar Bed !  
Evidout ar Pobloù a 'n em dag.  
A 'n em zifret  
A red.  
A dec'h, a lazh, a drouklazh  
A 'n em lazh...

Gant lizherennoù aour eo skrivet da anv  
War vannielloù ar Broadoù.  
Hag e vez engravet er metaloù  
Hag er vein.

Sevel 'ra dit ar Bobl delwennoù meur  
Ar Barzh a ouestl dit mil gwerzenn  
E pep Boud ac'h eus un amourouz

Da nikun avat 'n em roez anterin  
Nikun na'z anavez  
Rak ma n'eus ket ac'hanout.

N'ez eus ac'hanout nemet ur skeud  
A-walc'h eo d'hon lakaat holl da folliñ  
Da stouiñ, da ginnig dit hor gwazoniezh.

Touellerez ac'hanout !

**Liberté (troet gant / traduction Paol Keineg)**

La formidable magie de ton nom  
Sème la folie de par le monde !  
Pour toi les Peuples se prennent à la gorge.  
Se déchirent.  
Courent.  
Fuient, tuent, assassinent,  
Se suicident...

On a écrit ton nom en lettres d'or  
Sur les drapeaux des nations.  
On l'a gravé dans le métal  
Et dans la pierre.

Le Peuple t'élève de grandes statues  
Le Poète te dédie des milliers de vers  
Tous les Êtres sont amoureux de toi

Et pourtant à personne tu ne te donnes entière  
Personne ne te connaît  
Car tu n'existes pas

Tu n'es pas plus qu'une ombre  
Tu existes pour nous rendre fous  
Pour qu'on se prosterne, pour qu'on te prête hommage.

Espèce de sorcière !